

Jacqueline GIBSON

Pa rae glaou etre Kembre ha Breizh

A-raok deroù ar Brezel Bras e teue an darn vrasañ eus ar glaou implijet gant Bro-C'hall eus mengleuzioù ar Pas-de-Calais, tonennoù ouzhpenn eus kreiz Bro-C'hall, ar pezh ne oa ket a-walc'h evit bastañ d'an ezhommoù. Enporzhiet e veze neuze eus Breizh-Veur, eus an Alamagn hag eus Bro-Belgia. Deroù ar brezel a verkas un ehan er c'hementad glaou o tont eus an div vro diwezhañ-se ha savet e voe un emglev etre Bro-C'hall ha Breizh-Veur na greskje ket re priz ar glaou tramor. Pevar bloaz goude, a-raok na zistroas an enebourien d'o bro e voe peurzistrujet ganto an dreistframmoù hag al linennoù-houarn, beuzet ar poulloù-glaou, ha drastet da vat ar c'hornvro-se. Ret e oa daougementiñ an tonennoù glaou o tont eus Breizh-Veur.

Gouarnamant Bro-C'hall a savas reolennoù evit ma vefe dasparzet an danvez priziüs-se dre ar vro d'ar memes priz. E 1916 e voe krouet Burev Broadel ar Glaou (BNC e galleg) a oa e bal kinnig glaou d'an uzinoù kenkoulz ha d'ar stalioù a werzhe d'an tiegezhioù. Sañset e oa ar burev-se padout pemp bloaz met kenderc'hel a reas gant e labour betek 1921.

Evit ar Vretoned e oa porzhioù glaou Bro-Gembre evel Swansea, Kerdiz, Barry ha Newport a oa en tu all da Mor

Breizh, ur veajig daou zevezh nemetken evit mont di pa veze brav an amzer. Dre ma oa fall an hentoù ha ral an hentoù-houarn e Breizh e veze implijet bagoù dre lien evit degas danvezioù liesseurt a borzh da borzh a-hed aodoù hanternoz ar vro. Niverus e oa goeletennoù ha dundeoù Bro-Dreger ha reoù Bro-Oueloù, 20 pe 30 m o hirder, graet e koad, keflusker ebet warno dre vras. Treuziñ Mor Breizh a oa dañjerus, abalamour d'an aodoù roc'hellek a gaver war an daou du ha dreist-holl peogwir e klaske al listri-splujer alaman kas d'ar strad an holl vigi, re vrezel kenkoulz ha re goñvers. Daoust da se, kapitened ar goueletennoù a c'hounete mat o buhez ha lakaat a raent sevel bigi nevez e chanterioù Pempoull, hep klask degemer vaporeioù el lestraz kenwerzh. Klotañ a rae mat ar bigi dre lien ouzh porzhioù bihan hanternoz Breizh : gallout a raent mont betek foñs an aberioù, marvoriñ war ar sec'h pa veze ret hag mont a-dizh pa veze avel a-dreñv. Evel-se, eus deroù ar Brezel Bras betek mare an eil Brezel Bed e kendalc'has kapitened Breizh da vont da gerc'hat glaou e Bro-Gembre.

Etre an daou vrezel avat e klaskent ivez treuzdouden marc'hadourezh evit ar veaj mont. Degas a raent dreist-holl peulioù-min ha legumaj da Gerdiz pe da Swansea evit dont en-dro gant glaou ha netra ken, koulz lavaret. A-wechoù e veze skoulmet liammoù a vignoniezh etre familh ar gapitened ha pennoù bras ar porzh ha kaset ar vugale d'ur vro d'eben da zeskiñ ar yezh all.

Unan eus al linennoù darempredet ar muiañ a veze an hini etre Rosko ha Kerdiz. Ouzhpenn legumaj a veze a wechoù e kalioù bigi Breizh adalek fin miz Gouere. Bez' e oa eno a-leizh a sac'hadoù onion roz sukret Bro-Leon a blije kement da Gembreiz met ivez ar baotred a yae d'o gwerzhañ a di da di betek miz Kerzu. Joniged a veze graet anezho e Rosko, Johnny Onions e kêrioù bras pe vrasañ Kembre, ha Sioni Winwns er c'hêriadennnoù hag ivez war ar maez pa veze kreñv c'hoazh

implij ar c'hembraeg eno. Ur dornad mat anezho o deus desket komz kembraeg en ur ober o micher, ar pezh n'eo ket ur souezh rak brezhonegerien e oant ivez.

Pa errue goueletennoù Breizh e Kerdiz ez implijent dalc'h-mat al lenn porzh bihanañ, ar Bute West Dock. Ha nag un arvest kaer neuze evit ar re a labour e tost e-kichen. Mistr, liesliv ha kempennet a-ratre gant ekipajoù yaouank a save ordin ar ouel gastell evit embregiñ el lenn. Homañ ne veze staliet nemet war ar bigi bet savet e Breizh.

Ur C'hembread yaouank war-dro 25 bloaz a labour e en embregerezh chaluterien dre vaper staliet ivez war ar West Dock a chome bamet ouzh kaerder ar goueletennoù-se hag ampartiz o martoloded. Dre ma oa e dad, e dad-kozh hag e eontred ar renerien, e c'halle a-wechoù mont kuit diouzh e labour da gemer fotoioù, war-droad pa veze bigi Breizh o c'hortoz e tigorje skluzioù al lenn, gant e ganod ivez pa vezent eoriet pelloc'h. Neuze e roeñve betek enno evit goulenn digant kapitened eus pe borzh e teuent, peseurt tizh o doa sanket, pe vag e oant en em gavet ganto e Mor Breizh... Embann a rae e notennoù er gelaouenn-vor *Sea Breezes* ha pennadoù hiroc'h a-wechoù ivez.

130 luc'hskeudenn kemeret gant Jack K Neale a-hed a bloavezhioù 1930 a gont istor e vigi muiañ-karet, barzhoniel o anvioù : *Océanide*, *Hermann*, *Sylvabelle*, *Domino*, *Bretonne*, *Dixi*, *Roscovite* h.a. Pa yae unan a-benn ul lestr all, evel ma c'hoarvezas gant *Yvonne*, pe pa raent peñse war aodoù su Kembre evel *Idéal* ha *Goéland*, e kemere Jack Neale e garr hag eñ mont war al lec'h da gemer fotoioù eus an darvoudoù.

Pa grogas an eil Brezel Bed ez enrollas Jack Neale e RNVS (*Royal Navy Voluntary Service*) hag eñ war morioù ar bed o stourm evit e vro. Ne zistroas da Gerdiz nemet e 1946 ha pebezh souezhadenn evitañ pa ne chome er porzh lenn

goueletenn ebet a Vreizh. Gwerzhet e oant bet holl da vroioù an hanternoz, evel *Océanide*, pe o doa graet peñse (*Sylvabelle*), kouezhet etre krabanoù an Alamaned (*Hermann*), pe re ar Saozon (*Dixi*). Ar re all ne vezent ket implijet ken ha chom a raent da vreinañ en un oufig bennak e Breizh (*Églantine*). Bed ar verdeadurezh koñvers a oa bet eilpennet. Vapeurioù zoken a oa deuet da vezañ mod kozh e-keñver ar bigi metal divent a rae gant eoul-maen.

Diouzh tu Kerdiz ne oa ket mat ar jeu kennebeut. Nebeutoc'h a vroioù a felle dezho prenañ glaou Kembre pa veze gwerzhet gant broioù all evel Bro-Bolonia hag ar Stadoù Unanet glaou a galite kinniget d'ur priz kalz marc'hadmatoc'h. Danvezioù-tan all ivez a oa deuet war wel evit ar bigi modern. Echu e oa an eil Brezel Bed ha ne oa mui glaou Kembre roue an treloskoù.

Embregerezh ar re Neale o oa kudennoù bras gantañ ivez. Rekisionet e oa bet holl e chaluterien e-pad ar brezel ha morse ne zeuas ar renerien da lakaat an afer war he flom adarre. Ober a reas freuzstal. Mont a reas Jack Neale da Gerne-Veur d'en em staliañ eno ha da c'hounit e vuhez er foresterezh.

Pa 'z eas war e leve avat e troas e spered en-dro etrezek ar bigi dre lien breizhat a blije kement dezhañ. Amzer a-walc'h en doa evit sevel ul levrig a gontfe istor ar bigi en doa gwelet ha studiet e porzh Kerdiz. Prefed Aodoù-an-Hanternoz a gasas dezhañ ur roll eus ar verdeidi en doa darempredet e Kerdiz tregont vloaz a-raok. Dont a reas Jack Neale teir gwech da Vreizh gant e familh evit kenderc'hel gant e enklaskoù hag adwelout ar gapitened hag ar vartoloded en doa anavezet e Kerdiz. Un degemer eus ar c'hentañ a voe roet da familh Neale. E vab henañ a enrolle ar c'haozeadennoù hag a droe ar c'homzoù eus ur yezh d'eben pa oa ret.

Ur wech distro d'ar gêr e savas Jack Neale un dornskrid titlet *Breton Schooners and Ketches* met, siwazh dezhañ ne gavas

embanner ebet evit e labour : re verr e oa ar skrid a lavare an eil, re goustus e vefe embann al luc'hskeudennoù hervez egile, ne oa ket dedennet Breizhveuriz gant an danvez hervez an trede. Dedennet e oa ar gelaouenn vreizhat *Le Chasse-Marée* met a-benn ar fin ne voe kavet emglev ebet. Reiñ a reas Jack Neale e levrig da Dielloù Broadel Kembre.

Tregont vloaz diwezhatoc'h en em vodas un dornad Tregeriz a-benn krouiñ ar gevredigezh *Océanide* a ra war-dro glad ar mor er c'horn-bro-se. Troet e voe al levr e galleg, ouzhpennet pennadoù displegañ, resevet an aotre embann digant ar familh ha kaset an dornskrid da g/Coop Breizh a embannas *Goélettes bretonnes, les belles heures du cabotage* e miz Mezheven 2020. Berzh a ra al levr c'hoazh hag eñ advoullet e 2021 neuze.

